

AR VRETONED D'AN TAN

War don kaër
An Alarc'h
(Barzaz-Breiz)

C'hoan-ted neuz an All-man-ted fall, C'hoan-ted neuz an All-man-ted fall, Dont c'hoaz da zis-tru-ji Bro C'hall. Din, din, daon! d'ann em - gann ! d'ann em gann !

ob ! Din, din, daon! d'ann em gann ! Ec'h an !

War don kaër
An Alarc'h
(Barzaz-Breiz)

I
C'hoantet neuz an Allmantet fall (*diou wech*)
Dont c'hoaz da zistruji Bro C'hall.

DISKAN
Din din daon, d'an emgann, d'an emgann,
Ho !
Din din daon, d'an emgann
Ec'h an !

II
Kredi' re Gwillou, al loen brein (*diou wech*)
En Pariz 'oa fichet e lein.

III
Mez meur a viz a zo dija
Eman al lein-ze o iena.

IV
Neventi vad d'ar C'hallaoued
Ha malloz ru d'an Allmantet !

V
Malloz d'an drasterien groage,
Merc'hed yaouank ha bugale !

VI
An dud koz gantê 've lac'het
Hag an ilizou distrujet.

VII
Hag ar paour kez Beljik vihan
'Zo laket en gwad hag en tan.

VIII
Mez ar Franz hag he mignoned
'Vit ar Frankiz a zo savet

IX
Ha deuz an tu all d'ar mor don
Eo deut armeou ar Zozon

X
Ar Veljik, Bro-Zoz hag ar Franz.
Me 'gred er wec'h-man devo 'lanz !

XI
Deuz an Alzas betek Dixmud
'Deuz lac'het d'ê millierou tud.

XII
Ha prestik rivier braz ar Rhin
Gant o gwad a vo liou d'ar gwin !

XIII
Hag ar Russi, deuz an tu all
A wask warnê gwella ma c'hall.

XIV
En Breiz-Izel ar botred vad
A zo et holl da vrezellât

XV
Skrignet 'neuz bleizi Breiz-Izel
O klevet embann ar brezel

XVI
Elec'h ma 'n emgann Bretoned
A red puill gwad an Allmantet

XVII
Ha pa gavont potred Gwillou
Ar re-man 'goue a druilladou.

XVIII
Gras d'ar Franz eman Breiz-Izel
O rei d'ei ar gwella skoazel.

XIX
C'houi, tadou ha mammou kristen
Kasit da Zoue eur beden.

XX
Da c'houlenn gras d'ho pugale
Dont c'hoaz d'ho kwelet en bue

XXI
Hag ive 'vit an dud varo
'Deus skuillet o gwad 'vit o bro

XXII
Ma 'vo skanv d'ê an douar ien
Ha ma voint eurus da viken.

XXIII
Ma voint eurus 'kichen Doue
P'o deuz gonezet al lore !

XXIV
Kasit da Zoue eur beden
Evit ma echuo souden

XXV
Ar brezel hag e holl garnach
Gwasoc'h 'vit er broïou sovach.

XXVI
Potred ar Prus 'lec'h ma kouefont
Betek de ar Varn a chomfont

XXVII
An dour a gouezo eus ar gwe
'Raï dour binniget war o be !

DISKAN
Din din daon, d'an emgann, d'an emgann,
Ho !
Din din daon, d'an emgann
Ec'h an !

Pierre JAOUAN. — Tous droits réservés